

**Inizan Lan** (Gwinevez 1826 – Gwinevez 1891)

**Toull al lakez**, bet embannet e 1878, bet adembannet e 1930.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

**Roll an traou**

Lan Inizan (e vuhez)

Toull al lakez (Kinnig)

Toull al lakez (Skrid)

**Inizan Lan** (Gwinevez 1826 – Gwinevez 1891)

**Toull al lakez**, bet embannet e 1878, bet adembannet e 1930.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

**Notenn gand “Embann an Hirwaz “** : Iskiz-kenañ eo ar skrid-mañ. Se ‘zo soñjou beleien an naonteg kantved !

## Lan Inizan

### I.

#### E vuhez

Lan-Mari Inisan<sup>1</sup> a oa ganet d’an tri warn-ugent a viz Du 1826 e parrez Gwinevez-Lokrist, e maner Lanzeon.

Lanzeon, hirio, a zo eur gêriadenn, savet war eun dorgennig, eur hard-leo en tu all da Lokrist-an-Izelved, tost da aod Kernig. Ti an Inisaned, deuet da veza bremañ eun ti heñvel ouz an oll diegeziou diwar ar mêz, a oa gwechall doare eur maner anezañ, gand e vein-benez hag e deir douribell. Adaleg ar XVI<sup>ved</sup> kantved da nebeuta, an Inisaned a veve eno, an eil rumm war-lerh egile.. Ha tudjentil e oant ? An aotrou Paol de Courcy, unan euz desketa skrivganerien or Bro, a skrive, eun devez, da Lan Inisan “ e hellfe beza e famill euz an noblañs rag Guy ar Borgn, en e leor *Armorial Breton* (1667), en-doa livet ardameziou an Inisaned, eur skoed aour, ha, warnañ, eur roudenn ruz gand teir gwalennig ruz, renket, diou en neh, hag unan en traoñ.

Ma ne oant ket tudjentil, e oant da vihanna tud a feiz ha gwir Vreiziz. Er paperiou koz (ha, siwaz ! evel ma lavar Lan Inisan e-unan, eur halz a baperiou koz Lanzeon a zo bet kollet dre leziregez, pe gwerzet zoken d’ar billaouerien pe d’eur hemener bennag a walenne e vezer ganto), - e kaver ano, e famill Lanzeon a rumm da rumm, pe euz eul leanez pe euz eur beleg. Rena Inisan a varvas e Kastell-Paol, leanez e tu an Ursulinezed, e 1781 ; Fanny Rozec, moereb d’an abad Inisan, a oa leanez er Retred e Kemper e 1879 ; Lan ha Per, daou vreur ; Bastien, maro e 1691 ; Andre, maro e 1686. Yann-Klaoda, breur d’e dad-koz, a gomzer anezañ e *Emgann Kergidu*, a oa bet person Plouzane ha Lomaria e amzer an Dispah ; e ano a vez lennet c’hoaz war an tour, savet gantañ er bloavez 1775. N’en-doa ket falvezet gantañ senti ouz lezennou an Dispaherien, ha setu perag e oa bet paket gand an Tunk (*Emgann Kergidu*, p. 132), ha kaset da gastell Brest, ha hedal ma vije barnet ; mervel a reas e Plouzane d’ar 16 a viz Eost 1802.

A-hend-all perhenned Lanzeon a oa kustum dezo beza e penn Fabrig ar barrez. E 1595, unan anezo, Yann Inisan a oa, hervez ma lennom er paperiou koz, « sceindique de la Fabrique ». Diwezatoh, eun Inisan all, breur da dad an abad Inisan, a oa “Teñzorier an Iliz“, e-pad hanter-kant vloaz. Hemañ a respontas eun devez da Lan a oa o tond euz skolaj Kastell,

---

<sup>1</sup> Inisan : **Notenn el leor orin** : En eur pennad dorn-skrid, an abad Inisan a ra deom da anaoud en-deus atao Inisaned skrivet o ano, adaleg 1587, gand eun S ha n’eo ket gand eur Z.

peurhreet gantañ e studi : « Daoust dit da veza gounezet kemend-all a brichou, n'ez ket da gredi e vez eet ganez oll spered an Inisaned ».

Setu eta famill an abad Lan Inisan. E dad a reed anezañ Yann-Per ; e vamm, Jann an Hir, a oa genidig euz a Vodiliz. Lan a oa kaset da Skolaj Kastell-Paol ; eno e oa unan euz ar varreka e-touez ar skolaerien all. Echu gantañ e amzer-studi, ez eas da gloerdi braz Kemper, hag eno c'hoaz e tiskouezas pegen lemm e oa e spered ha pegen aketuz. An aotrou Fave, person Gwikasnou, hag a oa bet gantañ er hloerdi braz, a lavare « ne haved ket, d'ar mare-ze, er hloerdi, kaierou gwelloh stummet, bravoh moulet o skritur anezo, eged kaierou Lan Inisan ».

Goude beza bet beleget (14 a viz Mezeven 1851), e oa anvet da gure e Gwikourvest (28 a viz Mezeven), ha tost goude (11 a viz Meur 1852) e Bodiliz, bro e vamm. Euz a Vodiliz e oa kaset da Wikasnou (28 a viz Gouere 1853), da Bleiben (6 a viz Eost 1859) ha da Hañveg (22 a viz Gwengolo 1861). Er barrez diweza-mañ ne chomas ket pell, amzer hepken da zina eur vadeziant (30 a viz Gwengolo), hag eun interamant (4 a viz Here 1861), rag an abad Guzenec, lakaet kure en e leh, a oe anvet an 8 a viz Here. En eur guitaad Hañveg, an abad Inisan a deuas da chom da Lanzeon, gand e gerent.

E dibenn ar bloaz 1865, e kavom an abad Inisan, en Normañdi, evel kelenner e skolaj an Neubourg (departamant an "Eur", renet gand an abad Normand. Anvet e oe da berson e Sant-Denez ar Meneziou, parrez euz eskopti Evreux, ar 1<sup>a</sup> a vie Here 1869, hag eno e chomas beteg ar bloaz 1871, bete ma teuas en Normañdi ar Brusianed, treh d'ar Hallaoued. Evel ma konte diwezatoh an abad Inisan, « ar Brusianed o-deus lamet ouzin va zi, hag e rankis dond en-dro da Lanzeon ». Diêz eo da houzoud ma kendalhas an abad Inisan d'ober skol e Neubourg e-pad ma oa person, rag an "Ordos" euz eskopti Evreux ema bepred war roll kelennerien an Neubourg er bloaveziou 1868, 1869, 1870, 1871. Ne gredom ket koulskoude, rag eur flipad mad a hent a zo etre Neubourg ha Sant-Denez ar Meneziou.

Setu bremañ, evid an eil gwech, an abad Inisan deut da veza beleg dibarrez e Gwinevez-Lokrist.. En e euriou vak e krogas gand eul labour nevez evitañ, rag, evid doare er mare-ze eo en em roas da skriva en brezoneg hag e lakaas war ar stern *Toull al Lakez*. Ar gontadenn-mañ – eur soñjezon euz e yaouankiz, - a oe da genta moulet, er bloaz 1874, war ar gelaouenn-gelg koz *Feiz ha Breiz*, a-raog beza moulet diwezatoh, er bloaz 1878, en eul leorig, ti al leorerien Lefournier, euz a Vrest. En eur ober moulla e gontadenn e *Feiz ha Breiz*, an abad Inisan ne zinas ket e labour euz e ano, med hepken al lizerennou D. L., da lavared eo : Dom Lan. Marteze ivez, er bloaveziou-ze, e krogas gand *Emgann Kergidu*, med diêz eo da houzoud, rag n'ouzer ket peur na penaoz en em lakaas an abad Inisan da skriva al leor-mañ, a roas dezañ, dre Vreiz-Izel a-bez, brud eur skrivagner dispar e brezoneg.

E miz Here 1874, e kavom adarre an abad Inisan oh ober skol. Anvet e oe da gelenner er skolaj Itron-Varia Wir-Sikour, e Gwengamp, renet neuze gand an aotrou chaloni Cotentin. Beteg diwez ar bloavez-skol 1879 e teskas ar galleg, al latin, an istor hag an niveroniezh (arithmétique) da vugale vihan ar 7<sup>ved</sup> klas. E derou ar bloaz 1877, e oa krog da voulla *Emgann Kergidu*, hag, evel on-eus gwelet, er bloaz 1878, eh embannas *Toull al Lakez* en eul leorig n'emañ e gwerz pell 'zo.

Rei a reas dilez euz e garg a gelenner gand ehan-skol ar bloaz 1879, ha neuze en em dennas, evid mad ha beteg e varo, e presbital Gwinevez. Taget e oe gand eur hleñved kriz ha n'hell den beza treh dezañ : ar hrign-beo, paket gantañ en e houzoug, hervez ma konter, diwar e gorn-butun. Nouennet e oe gand an aotrou Guen, kure Gwinevez d'ar mare-ze, ha, d'ar 5 a viz Eost, er bloaz 1891, e varvas e peoh an Aotrou Doue, hag e oe beziet e bered Gwinevez, e-kichenn e dadou-koz.

Per Pronost<sup>2</sup>, eur barz brudet genidig euz a Dreflez, en-deus bet an eurvad da weled diou wech, e presbital Gwinevez, an abad Inisan, ha displeget en-deus ar soñjezon-ze euz e yaouankiz, en eur pennad-skrid embannet gwechall er gelaouenn-gelg *Spered ar Vro* (Eost

<sup>2</sup> Per Pronost : **notenn el leor orin** : Ganet e Treflez, ar 15 a viz Meurz 1861 ; marvet e Brest, ar 5 a viz Genver 1909.

1903). Plijadur a raio, war on mennoz, da lennerein *Toull al Lakez*, kavoud, amañ war-lerh, an darnvuia euz ar pennad-skrid-se, a ziskouez deom ar pezh a oa, d'ar mare-ze, war-dro ar blaoveziou 1875-1880, an abad Inisan.

Ma'z eus bet skrivet biskoaz en or yez levriou brezoneg gwirion eo *Emgann Kergidu* ha *Toull al Lakez* ; n'eus ket kalz kennebeud a wir Vretoned evel an hini en-deus o skrivet.

Ya, ma'z eus bet e Breiz-Izel eur gwir Vreton eo ar beleg an Aotrou Inisan euz Gwinevez-Lokrist.

Me 'oa yaouankig p'am-oa her gwelet, ar wech kenta.

An Aotrou Inisan en-doa eun nebeudig madou ; evid en em rei oll d'ar studi karet ne chomas ket beleg-parrez ; lavared e reas e overenn e Gwinevez-Lokrist, e Treflez pe e Ploueskad.

D'ar vakañsou<sup>3</sup> ez an aliez gand an Aotrou Tanguy da weled oh taol, e welis eur beleg ha n'em-oa ket bet gwelet c'hoaz e presbital Gwinevez-Lokrist.

E-pad lein n'hallen ket tenna va daoulagad diwarnañ ; n'her haven, an Aotrou Roux<sup>4</sup>, ha va degemere atao gand karantez. Eun devez ket heñvel ouz ar re all : e zellou, e gomzou ha beteg e jestrou o-doa ne ouien petra a zibaot hag a roe din doujañs, med eun doujañs ha va foulze d'hen anaoud gwelloc'h ha zoken da glask an tu da veza e vignon.

Koulskoude n'em-oa ket gallet dond a-benn, en devez-se, da gomz outañ, ha me a dleas distrei da Dreflez, gand displiadur. A-hed an hent avad imaj ar beleg dibaot a oa dirazon. Gweled a reen e zaoulagad don ha lemm, e vleo gwenn ha fuillet o tispaka, war e dal uhel, eur gurunenn arhant, ar pezh a ree din soñjal er roue Gradlon, e gwerz *Kêr-Iz* :

Hag en-dro d'e dal e vleo gwenn

A ree dispak eur gurunenn.

Goulenn a ris digand an Aotrou Tanguy piou 'oa ar beleg en-doa kement va lakaet da huñvreal ;

Ar beleg-se, Perig, eo an Aotrou Inisan, en-deus greet *Emgann Kergidu* ha *Toull al Lakez*, a gavez ken kaer !

Ya, emeve, e vrezoneg a zo kaerroh eged ar galleg, al latin hag ar gregaj.

Ne dleen gweled an Aotrou Inisan nemed daou vloaz goude.

\*

An Aotrou Tanguy a deuas da vervel... ha, d'ar vakañsou war-lerh, ar vakañsou diweza, siwaz ! teñval va fenn, ha rannet va halon, me a heulie va-unan an hent a ya euz Treflez da Winevez-Lokrist.

Degemeret e oen gand an Aotrou Roux gand muioh c'hoaz a garantez, hag oh taol, en dro-mañ adarre, em-boe an eurvad da weled an Aotrou Inisan.

Daoust hag-eñ a lennas e goueled va halon ? Ya, moarvad, rag, da houde lein, p'am-boe lavaret kenavezo d'an Aotrou Roux, em heulias war hent Treflez, e-leh m'on diskennet e ti va eontr e kêriadenn Kêrruz<sup>5</sup>.

An heol a lugerne, bleun ar skao war ar hleuziou a skuille en êr o hwez vad ; eun dudi 'oa beva war an douar an devez-se.

An Aotrou Inisan a houlennas krenn :

-Perag, Perig, eo teñval da benn, pa eo ken laouen pep tra ? Daoust ha buhez ar holaj ne blij mui dit ?

Ar holaj a blije din kalz, a-raog, med abaoe maro an Aotrou Tanguy em-eus evel euz ouz ar galleg, al latin hag ar gregaj.

<sup>3</sup> D'ar vakañsou : **notenn el leor orin** : P. Pronost a oa neuze skolaer e Lezvenen, hag an abaded Tanguy, person Treflez, ha Roull, rener ar skolaj, a bae ar skol evitañ, rag paour 'oa e gerent.

<sup>4</sup> Roux : **notenn el leor orin** : Person Gwinevez.

<sup>5</sup> Kêrruz : **notenn el leor orin** : D'ar mare-ze, kerent P. Pronost, rivinet gand dihlann ster ar Zeaz, a dremen dre barrez Treflez, a oa eet da chom e Brest.

-Mad, Perig, eme an Aotrou Inisan, n'eus forz peseurt hent a gemeri en da vuhez, me a ro eun ali dit : studi ar brezoneg, hag a-raog kenavezo din, tou dirazon e laki ar pezh ah-eus a zeskadurezh da harpa or yez.

E zaoulagad lemm a bare warnon hag an tan anezo am zrehas kement, ma teujen da respont, hep chom da varhata :

- Hen tui a ran, Aotrou Inizan<sup>6</sup>.

Abaoe n'em-eus ket ankounac'haet ar ger roet da skrivagner *Embann Kergidu* ha *Toull al Lakez*, ha kaoud a ra din atao gweled daoulagad dous ha lemm an Aotrou Inisan o para warnon, hag e vleo gwenn ha fuillet o tispaka, war e dal uhel, eur gurunenn arhant.

## II. OBEROU

1- *Toull al Lakez*, gand Lan Inisan, beleg a Winevez-Lokrist, « zispleg, ken brao ha tra, kentel ar zeizved hag an degved gourhemenn a Zoue ». « Na kaerra fistadenn, - a skrive gwechall an Aotrou Moan, person Plourin-Gwitalmeze da Lan Inisan. – na kaerra fustadenn a roit aze d'an neb a zo hir e vreh ha digor-braz e graban, diohtu ma wel eun dra bennag da blijoud dezañ. »(An abad Moan, Ar pevare gourhemenn a Zoue<sup>7</sup> ; p. 10).

2- *Emgann Kergidu* ha traou all c'hoarvezet e Breiz-Izel e-pad Dispah 1793 gand Lan Inisan, beleg a Winevez-Lokrist.

3- *Buhez Sant Frañsez a Aziz*, gand Lan Inisan (moulet da genta er bloaz 1889). An Aotrou Goff, person Gwinevez, a alias an abad Inisan da skriva al leor-mañ, hag evid se, hemañ en-deus kinniget e labour da berson e barrez.

4-Skrivet en-deus ivez eur haierig, ennañ doare familh an Insaned, adaleg 1500 betek 1887.

An oll labouriou-ze a zo euz ar re wella, euz ar vraoa a hellom da lenn e brezoneg, abalamour d'an traou kaer ha diduelluz a zo displeget ha livet enne, en eun doare deread. Ar skridou-ze, daoust ha n'int ket heñvel euz skeudennou koz on Ilizou, kizellet e mên-grouan, kaled ha paduz an danvez anezo, ha kaer-meurbed gand o mantellou broudet, gand o gwiskamantchou labouret ken souezuz ? Ra vezo atao yez on tadou-koz, yah ha beo, ha digeramesk, evel ma kavom anezi e leoriou Lan Inisan !

*N'eo ket sinet ar pennad-se.*

---

<sup>6</sup> Inizan : **notenn el leor orin** : Ar pezh ne lavar ket Per Pronost eo e talhas d'ar ger roet gantañ d'an abad Inizan. Skriva a reas e brezoneg er *Hourrier*, en "*Espérance bretonne*" (dindan lesano Gwenole), e *Kroaz ar Vretoned*, er *Bobl*. Skigna a reas amañ hag a-hont meur a werz hag a zon, a zastumas diwezatoh, er bloaz 1902, en eul leor : *Annaik, Lili ha Roz gouez*.

<sup>7</sup> Ar pevare gourhemenn a Zoue : **notenn el leor orin** : Ar re blijjo gante gouzoud piou 'oa Per azr C'Hraver, ar Iaik, an Toli, a gomzer outo e *Toull al Lakez*, n'o-devezo neemd lenn leor an abad Moan. Hemañ, genidig a Winevez-Lokrist, en-deus o anavezet mad.

# TOULL AL LAKEZ

## KINNIG

*D'am hamarad Fañch ar Moan, kure Eusa.*

Gweled a ran n'hoh-eus ket ankounac'haet, va hamarad Fañch ar Moan<sup>8</sup>, peger stard, p'oam bihanig, er gêr, e tivenn or mammou ouzom mond war-dro *Toull al Lakez*, pa'z eem da hoari d'an aod. Soñj hoh-eus e veze lavaret deom e oa an toull-ze eur vleizez-vor, reun loued war livenn he hein gand he zorad re vihan, hag a lamme en eun taol, er-mêz euz an dour, kerkent ha ma'z ee eur hrouadur bennag e-kichenn. Kregi a ree ennañ, a lavared deom ; her sacha a ree da oueled an toull, hag eno her roe da zebri d'he bleizi bihan.

Gouzoud a rit ne dostaem morse ouz an toull-ze, rag aon on-doa. Ha koulskoude, dioh a-bell, n'oam ket evid mired da zavel war eur roh pe eun torr-kleuz bennag da zelled ha da houzouga war-zu *Toull al Lakez*, da houzoud ha gweled a rajem ar vleizez koz er-mêz euz an dour, hi he-unan, pe gand he re vihan. Biskoaz n'on-eus gwelet netra, hag evelato, en eur zond d'ar gêr, pa gomzem a *Doull al Lakez*, n'oam ket evid mired da zelled, gand enkreuz, endro deom, gand aon na vije deuet ar vleizez koz, a-dreuz an douarou, war on lerh ha da razailla warnom, pa zoñjfem an nebeuta.

Ha n'eo ket or mammou-ni hepken a lavare an traou-mañ d'o bugale, ar mammou all a dro-war-dro a lavare ar memez tra, hag an oll vugale, kerkoulz ha ni, a dehe dioh *Toull al Lakez*.

Goulenn a rit diganen, va hamarad Fañch Ar Moan, perag e ree *Toull al Lakez* kemend-all a aon d'an Arvoriz, paotred diskramaill, dispont koulskoude, ha boazet dioh ar mor don. Setu amañ, goude beza klasket e meur a leh, ar pez am-eus kavet war gement-se el leoriou braz.

---

<sup>8</sup> Fañch ar Moan : **notenn el leor orin** : An abad Fañch ar Moan, deut da veza diwezatoh person Plourin-Gwitalmeze, a zo marvet er barrez-se e miz Du 1927.

# TOULL AL LAKEZ

Laerez na miret madou don

Gand gouiziegez na ri biken

Eur wech ar bloaz da vihanna  
E kovesai heb nah netra.

D'an nao a viz Eost, er bloaz pemp kant seiz ha daou-ugent, goude maro or Zalver Jezuz-Krist, war-dro teir eur goude kreisteiz, tomm an heol ken a boaze, eur marheg, gantañ war e benn eun tok-houarn, ha, war gern e dok-houarn, eur bouchad teo a rubanou ruz, ker ruz hag ar glaou, a ziskenne d'an daoulamm diwar-zu Ploueskad d'al leh m'emañ bremañ Pont-Krist. E varh a oa digor e fronellou evel dor eur forn, hag ar fronellou-ze a zivogede, evel pa vije bet an tan enno ; e zaoulagad a oa liou ar gwad warnezo hag e gosteziou a oa gwenn-kann gand an eonenn ; poultarnna an hent braz a oa leun a bikou greet gand ar hwezenn a zivere dioutañ, ker gleb e oa.

O kleved eur marh o haloupad ker buan, Per-Fañch ar Hraver, - a oa azezet en disheol a-dreñv eur roh a zo e beg gwaremm ar Huiog, e-tal Pont-Krist, a-zehou pa'z eer euz a Bloueskad da Lezneven, - a deuas d'ar red d'an traoñ da gaoud an hent hag a zavas en eun taol war ar hleuz da houzoud piou 'oa an hini a yee ker buan-ze. Digeri a ree e zaoulagad evel diou vrinikenn o selled ouz ar marh hag ouz ar marheg pa deuas hemañ d'her gervel :

« Paotr, emezañ, va marh en-deus sehed ; e peleh e kavin-me dour da rei dezañ da eva ? »

« Emaoh e-kichennig, eme Ber : dirazoh emañ kanol ar Hernig ; mez, mar kirit trei amañ a-zehou, e vezo êsoh deoh rei da eva d'ho marh, rag war an trêz eo kaletoh eged aze dirag, e-touez al lehid. »

« Mad ! bale a-raog da ziskouez din. »

Per a ziskennas en eul lamm diwar ar hleuz hag a yeas d'ar red a-raog ar marheg. P'en em gavas war an trêz, e lavaras dezañ :

« Sellit, aze emañ ar ganol, aze ez eus dour-red. »

« Ya, gweled a ran war-zu ar ganol. » Ne lavaras ket bennoz Doue da Ber, avad.

Ar marh, kerkent ha ma welas an dour, a bleg e benn, hag en em lakaas da gluka gand kemend a herder, ma kleved, kant paz a dro-war-dro, e henaouadou dour o koueza en e gov.

E-pad m'edo er hiz-se pleget ar marh, e henou er ganol, an tortisou a stage eur valizenn a oa war e dalier, a deuas da derri gand ar beh a roe : ar valizenn a hanter-zigoras, hag anezi e kouezas forz peziou arhant gwenn an amzer-ze, hag a dalve, me 'bari, pep hini anezo, ugent real d'an nebeuta.

Per a oa eun tregont paz bennag a-dreñv hag a wele an arhant o koueza, mez ne lavare netra ; eur zoñj fall a oa en e benn. Evel-se, kerkent ha ma oe eet ar marheg en e hent, goude beza douret e varh, ez eas da gichenn ar ganol. Ar peziou arhant gwenn a zo etre e dreid, c'hoant en-deus d'o dastum. Selled a ra piz en-dro dezañ... N'eus den en aod nag en douarou a dro-war-dro... An diaoul a ouezas ar pehed en e galon. Per a blegas, a zastumas kement pez arhant a oa war an trêz, ha, ker buan ha ma helle, kuit ahano war-zu ar gêr, atao e zorn gantañ war e arhant, en e hodell, gand aon na vije deuet unan bennag d'her lemel digantañ.

Evelato dre ma'z ee, Per a huanade ; me 'gred e goustiañs a bike anezañ. Mez ma huanade Per, e zorn a oa ivez war an arhant e hodell... Treh e oe an droug d'ar mad.

Na me 'zo diod, emezañ, o kaoud kemend-all a nehamant. Na perag ne ve ket an arhant-mañ din-me ? Daoust ha n'eo ket me eo a zo bet o tiskouez ar ganol d'an aotrou ?... Ha neuze, ar had a zo d'an neb he fak : ha me eo am-eus kavet an arhant-mañ... Hag ouspenn, den n'am diskuillo, rag den n'en-deus va gwelet ; selled mad ha piz am-eus greet en-dro din ; archer ebed ivez 'ta ne hello dond da glask trabas ouzin... Marteze e ve mad din lavared an dra-mañ,

pa'z in da goves... O ! koves va havadenn !... Mez neuze e vezo lavaret din restaoli. Restaoli... restaoli... neuze emañ ker paour ha biskoaz !... Ha da biou e restaolin-me ? Ar marheg-hont a zo bremañ n'on dare peleh !... Nann, an traou-ze ne dint nemed sponterezed. Hag ouspenn c'hoaz, daoust ha, p'am-bezo lavaret va fehejou all, ne daio ket hemañ d'o heul ? Ar re goz am-eus klevet o lavared : « *Pehead kuzet, hanter-bardonet* »... Ya, ya, greet an taol, an arhant-mañ a zo din-me, ha warhoaz gantañ me a raio va gwaz e foar Sant Lorañs, e Ploueskad.

En eur zoñjal en traou-ze, Per en em gavas er gêr. Ober a reas an neuz da zebri e goan gand ar re all, mez ne zaleas ket da vond d'e wele da huñvreal en e arhant.

Tad Per a oa e ano Fañch ar Hraver. N'ouzon ket ket hag hennez 'oa e ano mad. Ne reed nemed an ano-ze anezañ, abalamour ma veze bemdez en-dro, dre Bloueskad, Gwinevez ha Tredrez, o kravad skudellou, podelou, lachefreou<sup>9</sup>, plajou ha zoken boteier-prenn. Peñselia a ree ivez ar pilligou, ar basinou da ober kouez hag ar basinou da horo ar zaout. Ouspenn-ze c'hoaz e varikleze<sup>10</sup> ar helhou metal a lakae an dud yaouank war o boteier da zul. N'en-doa brud fall ebed er vro, den n'en-doa bet biskoaz d'en em glemm anezañ, e giz ebed, hag evelato ne oa ket karet. Eun tamm diskred a oa anezañ abalamour ma talhe baro hir, ha dreist pep tra, abalamour ma'z oa eet da chom, en eun toull trêz en-doa greet er Hinivid, e tevenn Ploueskad, eñ, e wreg hag e vugale, rag iskiz e kaved gweled eur hristen o chom en eun heveleb ti, ha keit diouz ar gristenien all. Koulskoude, eur wech c'hoaz, nikun ne helle lavared en-divije kemeret eur vrochenn diwar goust den, na greet fallagriez e giz ebed. An traou-mañ a lavaras evid diskouez n'en-doa ket bet Per skwer fal digand e dud.

Antronoz Per a zavas abred euz e wele ken laouen ha tra, da vihanna da weled. D'e vreudeur ha d'e hoarezed e oe roet peb a damm bara torz. Per a lavaras n'en-doa ket a naon ken abred hag ez eas da foar Sant-Lorañs, da Bloueskad, da glask e zijuni. Ne oe greet van ebed evid her gweled o chom hep tamm soñjal ha red edo e vennoz kaoud gwelloh pred e Ploueskad eged e ti e dad, en toull trêz, er Hinivid.

Setu eta va faotr Per en e hent, e arhant gantañ en e hodell, hag e zorn gantañ ivez atao war e arhant, evel en devez a-raog.

P'edo o sevel d'ar Hrinon, a kavas eno paotred Yon ar Hoz, a Vilin-ar-Gall, a oa gand o zaout er waremm, war ribl an hent braz, hag a oa ganto eun neiziad laboused bihan.

- Sell 'ta, paotred Milin-ar-Gall, petra a zo ganeoh aze ?, eme Ber.

- Ni, eme Lik, ar hosa anezo, ni on-eus kavet amañ eun neiziad pistraked<sup>11</sup> bihan, hag a yelo bremaig, pa vezo eet or zaout d'o hraou, d'o gwerza da foar Sant-Lorañs, da Bloueskad.

E broiou az o, al laboused-se a vez anvet *strakerien-lann*, e broiou all *filiped-lann*. En or bro-ni, e vez greet *pistraked* anezo, abalamour, a gav din, ma lavaront atao : *Pis, trak, trak trak, trak, trak*.

- Me a ya ivez d'ar foar, eme Ber, ha, mar kirit, me a breno ho pistraked diganeoh.

- Te, Per ? eme Olier, ar yaouanka euz a baotred Milin-ar-Gall, souezet o klevet Per, a ouie a walh e oa paour.

- Ya, me. Diskouez anezo amañ, ma welin.

Olier a yeas war an hent braz.

N'eo ket pluet a-walh da laboused ; n'eus nemed marbleo warnezo. Ne dalvont ket kalz a dra.

A gav dit, Per ar Hraver. Me 'gav din, er hontrol, emaint e doare da veza gwerzet mad, rag êsoh eo boueta ha doñvaad al laboused pa ne vezont ket re bluet, a lavar an aotrouien a vez o prena laboused e pardon Sant-Yann-Keran.

Ya, te 'lavar an dra-ze. Mez n'eus forz : mar kerez me a breno da laboused diganez. Pegement e houlennez anezo ?

<sup>9</sup> lachefreou : **notenn el leor orin** : pe lechefe, plat rond ou ovale pour mettre des pâtes au four.

<sup>10</sup> e varikleze : **notenn el leor orin** : *Mariklez*, ouvrage. Se dit aussi bien de dessins à couleurs variées que de sculptures en relief en inscrutation.

<sup>11</sup> pistraked : bitraged, gwitraged.

Te, Per, a breno ar pistraked-mañ ? eme Olier, bremañ mantret oh e gleved.

Ya, me. Ha perag n'her grafen ket ? Daoust ha n'am-eus ket a arhant kerkoulz hag eun all ? Sell hag e weli.

Ha Per a dennas eun dornad arhant euz e hodell. Lik hag Olier a chomas o-daou mantret da zelled an eil oh egile. Mez an dra-ze ne badas ket pell. Lik, ar hosa, a lavaras :

- Mad ! Per. Pemp labous bihan a zo ganeom ; mar kerez e-pezo anezo evid daou wenneg ar pez.

Daou wenneg ! Re ger int.

Ya, mez ar re-mañ a zo pistraked evel-se, ha neziou pistraked a zo diêz da gaoud.

Daou wenneg !... Mad, greet ar marhad. Pemp a zo anezo..., pemp gwech daou a ra deg. Setu aze deg gwennege, ha ro din da bistraked.

Lik ar Hoz hag Olier a roas o fistraked da Ber, a gemeras o arhant, fouge enno, hag a deuas da gaoud o zaout.

En em gavet d'an neh da zao ar Hrinou, Per a azez war eur roh evid c'hoari eur pennad gand e laboused. Floura a ra o hein dezo ; skei a ra goustadig gand e viz-yod war o beg evid o lakaad da zigeri o genou hag o boaza da zebri boued. En eun taol, e klev ar pistrak koz, mamm al laboused bihan, o krial a-zioh outañ<sup>12</sup>. Per a zavas e benn da zelled, ha kerkent e neziad pistraked bihan a yeas kuit diwar nij.

Sell 'ta, eme Ber souezet, setu amañ traou drol avad ! Laboused ha n'o-doa ket eur bluenn warnezo, hag a nij kerkoulz ha re goz ! Petra eo an traou-mañ ?... Ba ! evid deg gwennege kollet ne dalv ket ar boan din en em hlahari kement. Arhant a-walh a zo c'hoaz em godell. Deom war-eeun d'ar bourk.

Ha Per a daolas e neiz goull dreist ar hleuz, e park ar brun Koier<sup>13</sup>.

P'edo o tiskenn da Bont-an-Traoñ, e klevas unan bennag o tond gand hast war e lerh. Distrei a reas da zelled, hag eh anavezaz Kolaig Leskonneg, euz a Lezneven, a yee buan dre an hent abalamour m'en-devoa c'hoant da veza abred er foar.

En dro-mañ, me Ber, n'eo ket en aner, nag e laboused e tispignin va arhant ; an dro-mañ e prenin kouignou, ha sukr a-forz warnezo, evid terri va naon, rag, pa zoñjan mad, n'em-eus bet tamm ebed c'hoaz hirio... Ola ! degasit din eun dousenn gouignou euz ar re wella a zo ganeoh ; arhant a zo em godell d'ho paea.

Kolaig a oa gantañ e baner war e benn ; kregi a reas enni gand e zaou zorn, unan a bep tu, hag he lakaas war benn e hlin da Ber da choaz e zousenn gouignou. Per en-doa c'hoant da furcha beteg ar foñs, abalamour da gaoud eur gouign a bep seurt ; mez Kolaig a viras outañ, hag a lavaraz dezañ kemered diwar horre ma karje, rag ne dee ket, evid eun dousenn hepken, da zirenka e banerad kouignou euz an neh d'an traoñ. Per a rankas kemered eun dousenn krakilinennou ; o faea a reas avad, gand fae, evel eun den ha na zell ket ker piz-se ouz e arhant.

Kerkent Kolaig a zammas adarre e baner war e benn, hag a yeas en e hent buan ma helle evid e bourk Ploueskad a-raog ar varhadourien all, heb taoler evez ebed ouz Per ar Hraver, rag m'en-divije troet e benn da zelled war e lerh, e vije chomet mantret a-walh. Nann, den n'her hredfe, nemed her gweled en-defe.

Setu amañ petra 'hoarvezas.

Kenta tiz en-devoe Per, pa oa krog en e gouignou, 'oe d'o lakaad en e hodellou, nemed unan a zalhas en e zorn da zebri diohtu. Soñj mad en-doa d'o debri oll a-raog en em gaoud er bourk, rag petra eo daouzeg krakilinenn e kov eur paotr evel Per ar Hraver n'en-devoa bet

<sup>12</sup> a-zioh outañ : **notenn el leor orin** : a-uz dezañ.

<sup>13</sup> ar brun Koier : ?



tamm d'e zijuni ? Krog e oa en e grakilinenn, savet e oa e zorn en êr, digor e oa e henou pa deuas, en eun taol, ar grakilinenn d'en em ziframma euz a dre e zaouarn ha d'en em blanta war ribl an hent braz, troet en eur gabell-touseg (e broiou 'zo e vez lavaret *tok-touseg*). An unneg all a lammas er-mêz euz e hodellou hag a reas ar memez tra, hag, e-leh e grakilinennou, Per ne welas a bep tu dezañ nemed daouzeg kabell-touseg, c'hweh a bep tu d'an hent, eun troad a-zindanno oll, ha daou baz etre pep hini anezo.

Per a chomas eun tamm sebezet. Eur zell a reas ouz e gouignou eet da gabellou-touseg ha, raktal, evel p'en-divije mez, e tehas kuit.

Ar vugale ne daolont ket kalz a spled<sup>14</sup> ouz an traou : ankounac'haad a reont buan. Eur wech troet d'e gabellou-touseg ha savet diouz Pont-an-Traoñ, Per a oa eet e zebezenn hag e aon gand an avel, ha n'en-doa ken mall nemed d'en em gaoud e-touez e gamaraded, er bourk, na ken youl nemed da zispign e arhant gand kalz a fougaserez. Evel-se ez ee ken dineh ha biskoaz.

P'en em gavas dirag tali Kerfrekant, e kavas eno eur paour-kêz dall o houlenn an aluzenn, ha, gantañ, eur hi-barbed du, eur glozenn en e henou.

A ! eme Ber, setu amañ eun dro vrao. Me ivez a zo bet o klask va bara hag a oar pegen diêz eo beza paour. Mond a ran da rei d'ar paour-kêz dall-mañ eun dornad arhant, ha, ma kar o espern, e hello chom pell heb mond da glask.

Ha Per d'e hodell en eur dostaad ouz ar paour-kêz dall. P'edo o vond da deuler e wenneg er glozenn a oa e genou ar hi, hemañ a lezas e glozenn da goueza d'an douar, hag a zerras e zaoulagad, evel p'en-divije mez o selled ouz Per. Hag ar paour-kêz dall a grias a vouez uhel, evel ma kri ar re a vez o houlenn an aluzenn er foariou pe er pardonioù :

-Krouadur, koll a rit an arhant-se.

Per, mezeg, ene ru zistrei ouz ar paour, a blegas da zastum e arhant, heb lavared ger. En dro-mañ e oa piket e galon, pe e goustiañs, rag entetet mad en-devoa. Ar paour ne lavare ket : koll a rit *hoh arhant*, mez koll a rit *an arhant-se*.

-Daoust, emezañ, hag hemañ en-defe bet eur helou bennag euz va havadenn-me ?... Daoust hag hemañ a oufe n'eo ket, e gwirionez, an arhant-mañ din-me ?... Neuze avad... Mez nann, an dra-ze ne hell ket beza gwir ; n'oa nemedon war an aod, selled piz em-oa greet en-dro din. Me 'doufe eo hemañ unan euz ar re-ze hag a vez oh ober o dall pe o hamm, er foariou hag er pardonioù, ha n'int ket dalloh ha kammoh egedon-me. Hemañ en-deus gwelet va arhant o vond a-biou d'am godell, ha setu perag en-deus galvet ahanon.

Ha Per adarre en e hent.

N'en-doa ket kalz da ober : kant paz c'hoaz hag edo war bavez bourk Ploueskad.

Mintin e oa c'hoaz, ha dre ze n'oa en em gavet den er foar ; stal ebed zoken n'oa c'hoaz digor. N'oa dre ar ruiou nemed bugale, o dillad da zul ganto, savet abred euz o gwele, evid mond da haloupad er bourk, da zigeri o genou evid gouzoud marteze e peleh e vije ar braoa pa vije ar foar en he feur<sup>15</sup>.

Per a yeas d'o haoud, an eil war-lerh egile, o dastumas oll en-dro dezañ, hag a lavaraz dezo :

- Paotred, mar kirit, da hedat ma tigor ar foar, ez aim da di Janedig ar Bombonou da ober peb a govad kouignou. Deuit oll ganen, heb aon ebed, me am-eus arhant da baea.

Ha gwir e hellfe beza kement-se, Per ? eme ar vugale souezet, rag gouzoud a reent peger

paour e oa tud Per.

N'eus forz ! ar vugale ne da ket keit-se dezo ; mond a rejont oll war-lerh Per da di Janedig ar Bombonou.

<sup>14</sup> spled : notenn el leor orin : ivez pled, ple.

<sup>15</sup> ar foar en he *feur* : notenn el lero orin : apogée (d'une chose), épanouissement : *eur paotr yaouank en e feur* (klevet ivez : *en e fleur*), un jeune homme dans la fleur de la jeunesse.

Lavared deoh ped kouign a oe lonket eno, e berr amzer, n'eo ket êz. Oll a ouzoh pegen don eo kov ar vugale p'en em gavont war draou lipouz, dreist pep tra pa ne vezont ket boazet diouto. Kouignou Janedig a deuze e genou ar baotred ker buan ha ker brao m'oa eun dudi o gweled. Pa veze eet eun dousenn, e veze degaset eun dousenn all, ha goude an dousenn-ze, eun dousenn all c'hoaz. Ez a stal Janedig da veza goullonderet !

A-barz ar fin, evelato, e oe karget ar hovou. Per a baeas heb marhata, a lavaras bennoz Doue da Janedig, hag a yeas kuit gand e gamaraded. Mar ho-pije gwelet ar baotred-mañ o vond, dre vourk Ploueskad, e vijeh chomet a-zav da zelled outo. Per a oa e-kreiz, sonn e benn, drant war e dreid, rok an tamm anezañ, hag ar re all a oa en-dro dezañ oh êsa gouzoud piou a vije an tosta, oh êsa komz outañ evid her meuli hag hen trugarekaad. Ha da beleh ez eont er hiz-se, or hanfarded ? Ne ouient ket o-unan, pa deuas Per, evel mestr ar vandenn, da lavared dezo :

- N'eus c'hoaz netra er bourk. Mar kirit, ez aim bremañ war hent Kleder da zelled ouz an dud o tond d'ar foar. Goude-ze e teujom en-dro, hag e raim adarre eun abadenn all a zebri kouignou.

-Ya, ya, eme ar baotred ; eom war hent Kleder, ha deus en or hreiz, Per. Pa vezo digor ar foar e tistroim d'ar bourk, hag e kavim kouignou all gwelloc'h marteze eged re Janedig ar Bombonou.

Hag ar baotred war hent Kleder. Dre ma'z eent, ne veze klevet nemed ar homzou-mañ :

- Te a zo eur gwaz, avad, Per !... Te a zo eun den, avad !...

Hag eñ lakaad an dorn war skoaz Per evid ober flourig dezañ. Ha Per, e-kreiz, a oa lorch ennañ.

Chom a rejont da hoari e-kichenn ar Groaz-Hir, war al letonenn a zo dirag Feunteun-Zant ?

Ne oe ket hir an abadenn hoari, rag, a-benn eun nebeudig amzer, e weljod or hamaraded oh en em dorta, oh en em starda, oh en em gordigella, oh en em ruilla war an douar, en eur ouela hag en eur grial e oant ampoezonet gand Per ar Hraver. Ar gwentl ar hrisa a oa kroget enno ; an tan a oa en o bouzellou, ne ouient war be tu trei. Unan hepken anezo ne grie ha ne youhe ket, ne ree nemed c'hoarzin dre ma wele ar re all o tua gand ar gwentl : henez 'oa Per ar Hraver. N'oa ket evid mired da hoarzin, mez ar re all a gave dezo edo oh ober goap, hag, evel pa vije eet droug enno, edont o vond da lammed warnezañ, pa deujont, en eun taol-kont, i o-unan, da hoarzin evel Per. Setu bremañ an oll o c'hoarzin a-unan. Mez o c'hoarz ne deue ket a-berz Doue, a gav din, rag o genou a oa faoutet beteg o dioukouarn, o muzellou a deuas da veza spinahet, ha zoken trouskenet, o daoulagad a oa dispourbellet hag entanet, o fri a oa krinet, o dent a strake en o fenn, hag e-leh trid kalon ar re a hoarz evdi mad, ne gleved nemed roherez<sup>16</sup> ha youherez o tond euz o gouzoug.

Me 'gav din e tle ar c'hoarz-se beza heñvel ouz c'hoarz an diaoulou en ivern, mar gell an diaoulou c'hoarzin.

Pegeid e padas an abadenn-ze, n'oufen ket her lavared. Ar pez a zo gwir eo, a-benn eur pennad, ne chome ken nemed Per ar Hraver war al letonenn, eet e hoarz n'oar den da beleh ; ar re all a oa eet pep hini en e hent.

C'hwi a zoñj deoh marteze e tlee an traou burzuduz-se touch kalon Per, her lakaad da ziskenn ennañ e-unan, ha lavared dezañ sklêr a-walh e teue e gouignou a-berz an diaoul. Siwaz, nann ! Al laer a oa kriz a galon, hag a zo diêz da zistrei.

Per, evel pa vije c'hoarvezet seurt gantañ, a zistroas d'ar bourk, hag a zegouezas, e penn ar hohi<sup>17</sup>, dirag ti Loeiz Jaouen, gand eur vandenn all a baotred a oa o c'hoari *pil pe fas*. An oll a oar ar c'hoari-ze : an neb a ra an dorn a daol e bez a wenneg en êr, hag a zo atao ar *fas*

---

<sup>16</sup> roherez : rohadenn.

<sup>17</sup> ar hohi : ar hohu ( ?)

evitañ, ar *pil* a zo evid ar re all. Er c'hoari-mañ e heller beza kement ha ma karer pa'z eo gwir unan a ra rampo ouz an oll.

Per ivez 'ta a deuas da gaoud ar re-mañ, ha, ker rok ha biskoaz, e lavaras dezo :

- Paotred, mar kirit, me a hoario ganeoh ivez.
- Ni a zo kontant, gand ma ri an dorn. Arhant a-walh ah-eus evid se ?
- O ! ya, bezit dineh.

Ha Per a diskouez dezo eur vozad mounreiz.

Ober an dorn, er c'hoari-mañ, a zo riskluz, pa hoarier a-eneb kalz : daou pe dri daol kollet a zo a-walh evid kas an den d'ar bern.

- Alo ! mad an dra-ze, eme ar baotred; an dorn da Ber ar Hraver, hag ar gweneg en avel.

Per a grogas en unan euz e wenneien hag hen taolas en êr, mez n'hen taolas ket uhel a-walh, hag e oe red dezañ komañs e daol a-nevez. En dro-mañ ken taolas ken uhel ha toenn ar hohi, en eur grial, hervez ar hiz :

- Deoh ar *pil*, paotred, ha din-me ar *fas*.

Ar gweneg, en êr, a droe hag a zistroe an eil tu war-lerh egile ; an oll a oa savet o fenn, o daoulagad o lugerni warnañ... Daoust war be du e troio ?

Ar gweneg a gouezas d'an douar hag a droas *fas*. Setu gounezet e daol gand Per.

- Eun taol all c'hoaz, eme ar baotred.
- Kement ha ma kerot, eme Ber.

Hag ar gweneg adarre en êr, hag adarre da goueza *fas*. Tri, pevar, pemp taol a oe greet er hiz-se, ha pep tro Per a houneze.

- Ahanta !, eme Ber outañ e-unan, ha n'em-eus ket greet mad kas en o zro ar zoñjou sod a lakae em fenn va foan gov ergentaou... En dro-mañ eo deuet an traou a-du ganen.

Mez siwaz ! n'oa ken achu an abadenn.

E-touez ar hoariereien a hoarie a-eneb Per, e oa daou baotr, dreist ar re all, ha n'oa ket pikouzet o daoulagad. Ker fin ha pep hini, heb beza trubard e-keñver den, an Toli hag ar Yaig a oa souezet, hag a chome mantret o weled Per ar Hraver o hounid bep taol. Meur a wech o-doa c'hoariet ar c'hoari-ze ; mar gounezent aliez, e kollent evelato a-wechou ; ha Per ne golle taol ebed !

- Daoust, eme an Toli d'ar Yaig, penaoz e hell Per ar Hraver gounid pep taol er hiz-se ? Êsaom eun taol all c'hoaz. Taol evez, Yaig, gwella ma helli ; me ivez ne lakin ket va daoulagad em godell.

- Greom 'ta eun taol all c'hoaz, eme ar Yaig, ha taolom evez mad.

-Alo ! Per, deus amañ c'hoaz eun taol all, eme an Toli, m'hen taoli war ar bern teil, rag n'on-eus ken nemed peb a wenneg.

- Keit ha ma pado hoh arhant, paotred, me a hoario ouzoh.

Ha gweneg Per adarre en êr, hag adarre da goueza *fas*.

N'ouzon ket petra a yeas dre benn an Toli o weled e kolle adarre. Lammed a reas war gweneg Per ar Hraver, selled a ra outañ diouz an daou du, ha ker buan, kounnar ennañ, e kri a-bouez e benn :

-Laer ! laer ! laer !... E wenneg a zo merket *fas* en daou du, ha dre ze n'oa ket evid koll eun taol, hag en-divije bet zoken c'hoant d'hen ober.

An Toli en-devoa lavaret gwir : gweneg Per a oa merket *fas* an daou du anezañ.

Neuze e savas kabal e-touez ar baotred, avad, va hredi a hellit. Kement hini o-doa kollet hag o-doa keuz d'o arhant, a razailas war ar paour-kêz Per. A-gleiz hag a-zehou e koueze, evel glao, an taoliou dorn war e benn ha war e ziouskoaz.

Taoliou dorn an Toli a oa ker pounner ha taoliou morzol ar Berder koz, pa skoe gwechall war e anev. Ar yaog a yee hag a deue a bep tu evid klask e dro da rei dezañ taoliou treid hag a gigne an divesker el leh ma kouezent. Kaer a oa skei, Per a zalhe mad d'e voned en-doa lakaet eul lodenn euz e arhant ennañ. An Toli a welas kement-se hag a roas dezañ eun taol ker

kreñv war e vreh dehou, ma rankas diskregi. Ker buan deg dorn a grogas er boned. Per a zalhe mad atao gand e zorn kleiz. Edo o vond da veza flastret gand ar vandenn baotred a oa warnezañ, pa deuas e voned da freuza, ha da skuilla an arhant war an douar. Setu petra a glaske an oll, an arhant laeret dezo. Diskregi a rejont diouz Per evid dastum ar pezh o-devoa kollet. Per ivez, kerkent ha ma kavas e du, a yeas ahano, heb ma oe red her pedi, buanna ma helle, gand e voned reuget<sup>18</sup>.

Kerzed a reas, d'ar red, dre an hent bihan a zo a-dreñv ar presbital evid mond da guzad, gand aon na vije c'hoaz deuet an Toli pe re all war e lerh. Siwaz ! Ne hellas ket mond pell, rag brevet e oa e gorr ha bronduet e zivreh a daoliou dorn ; kignet e oa e zivesker a daoliou treid, beh en-doa oh en em dreina. Chom a rankas a-zav ; azeza a reas e-harz ar hleuz, el leh m'eo savet bremañ ti ar Seurezed, hag eno, oh huanada, e lavaras outañ e-unan :

-Marteze, evelato, n'em-eus ket greet mad o kemered an arhant-mañ.

Daoust hag an Aotrou Doue, evid lakaad an den da zond ennañ e-unan, a zo red dezañ skei warnezañ ? Ha n'eo ket a-walh e aliou, e vuzudou, e viraklou ? Ar pezh a zo gwir eo taoliou dorn an Toli, ha taoliou treid ar Yaig, a reas muioh war galon ha war spered Per eged laboused displu o nijal, kouignou o trei e kabellou-touseg ha tud dall o weled sklêr.

Evelato, n'oa ket distroet c'hoaz war an hent mad.

A-benn eun nebeudig diskuiz, en eur ruill gand e zorn e arhant en e hodell, e lavaras :

- Me 'gav din eo gwelloc'h evidon chom heb mond da glask kamaraded ; n'eus hini mad ebed. Gwella am-eus da ober eo mond va-unan d'ar Halvar da vale, da bourmen, da houzaout ha kalz kezeg, kalz chatal a zo er foar.

- Hag en eur gempenn e vleo, en eur lakaad dres e voned reuget war e benn, ez eas d'ar plas-foar.

- P'edo o tegouezoud warnezi, e krogas ennañ eur hounnar-debri euz ar re zua. Kouezet brao e oa an dr-mañ, rag n'edo ket tregont paz diouz stal eur vaouez a Benez a oa eno o werza bara mouchenn. D'ar red ez eas d'he haoud hag, heb marhata, e prenas diou vouchenn, eun hanter real pep hini anezo. Ker kriz 'oa e naon ma ne droas ket e gein zoken evid diskolpa eur genaouad euz a unan ar mouchennou. Mez, siwaz adarre, a-veh m'oa eet an tamm en e henou, ma oe gwelet ar paour-kêz Per o tigeri e veg, o krina e fri hag e dal, o kreñchad e henaouad bara.

- Ar varhadourez, souezet, a houlenas outañ petra a hoarie gantañ.

- C'hwi, emezañ, hoh-eus gwerzet din-me bara greet gand trêz euz an aod. ha nann gand bleud malet er vilin.

- Bara greet gand trêz, va faotr paour !... N'ouzoh ket petra livirit. Bara greet gand trêz !...

- Ya, ya, a lavare Per en eur greñchad hag en eur dourlonkad ; ya, n'eus kuchenn bleud gwinit en ho para, n'eus ennañ nemed trêz...

O klevet eun tamm trouz, an dud a vodas buan en-dro d'ar stal, rag ar foariou a zo leun a henaouien. Evel maouez Pennez, an oll a chome mantret o klevet Per o lavared n'oa nemed bara trêz er stal-ze. Meur a hini, paotred fin war o meno, evid gouzoud pe 'oa gwir pe n'oa ket ar pezh a lavare Per, ha marteze ivez evid gelloud beza test ma vije eun tamm prosez, a brenas mouchennou digand ar varhadourez, ha kaer o-doa blaza ha divlaza, ne gavent nemed blaz mad gand ar bara-ze. Mez kaer en-devoa ar bara beza mad evid ar re all, evid Per n'en-doa ken blaz an trêz. N'eo ket souezuz ivez 'ta ma ne ehane da greñchad, rag, her hompren a dleit, bara greet gand trêz a dle skarza ar gouzoug gand ruster ha beza dizaour d'ar genou. Ouspenn-ze, tourjouna a ree e zent, ha devi toull e houzaout hag e vuzellou a dro-war-dro.

Per n'eo ket evid chom ken e-touez an dud ; mond a rank da eun tu bennag da glask eur banne dour da walhi ha da zistana e henou.

Hag an dud a lavare oh her gweled o vond kuit :

-Per ar Hraver en-deus kollet e benn !

---

<sup>18</sup> reuget : roget ( ?)

Nann, n'en-doa ket kollet e benn ; e ene avad en-doa hanter gollet dre e laeroñsi.

Mond a ra rag-eeun d'an ti kenta a gav dirazañ ; goulenn a ra, en ano Doue, eur banne dour da eva.

En ti-ze e oa ostaleri. N'eus forz, e Ploueskad, ez eus kalon vad e-touez an dud, dreist-oll pa houlenner en ano Doue. An ostizez a lezas e ostizien da zervija evid rei eur banne dour da Ber, rag gweled a ree n'edo ket an traou a-du gantañ, heb gouzoud evelato e peleh edo e hlaz.

A-veh m'en-doa Per evet eul lonkad dour hepken, ma oe klevet o termal ha, ker buan all, o tisteurel, evel pa vije roet dezañ eul louzou euz ar re greñva. Krial a ra, kas a ra e zorn d'e henou, dua a ra, dispourbella a ra e zaoulagad en e benn... Tud an ti a vod en-dro dezañ ; kaoud a ra dezo emañ o vond da vervel, rag pizennet eo ar hwezenn war e dal, ha beh en-deus o tenna e alan... Evelato, a-benn eur pennad, e torr warnezañ hag e hell kaozeal.

C'hwi, n'eo ket dour hoh-eus roet din-me da eva, emezañ en eur ouela, gwinegr eo.

-Petra 'levezet, Per, gwinegr eo ? Euz ar pod-dour em-eus diskarget eur banne dit, hag ar podad-dour-mañ a zo bet kerhet, n'eus ket eun eur c'hoaz, euz ar feunteun ; ha me 'gred ar feunteun-ze n'eo ket gwinegr eo a red anezi.

-Pa lavaran deoh, eme Ber oh heugi. Bremaig edo an tan em genou hag e toull va gouzoug hepken, ha bremañ, gand ho panne-gwinegr-c'hwi, eo diskennet em stomok hag em hov zoken. Devi a ra an diabarz ahanon... O ! va Doue, nag a boan am-eus-me !... Mond a ran d'ar gêr.

-Ya, gweloh eo dit, rag n'out ket yah, eme an ostizez.

Dirag ti ar Brun eh en em gavas tal-oh-tal gand Jozon, eur hanfard all euz a Bloueskad. Kerkent ha m'her gwelas, e lammas warnezañ en eur lavared :

-Atao emaut dre amañ 'ta, Per al laer, Per ar fripon ?

Ha Jozon da blanta gantañ taoliou dorn ker pounner ha re an Toli.

-Me da zesko, emezañ en eur skei, da zond da laerez on arhant-ni gand peziou merket *fas* en daou du.

Per a reas eur haloupadenn evid tehed ; Jozon ne deuas ket war e lerh : a-walh, a gave dezañ, en-devoa bet.

Teo e benn, du e dal, liou an nehamant warnezañ, Per a ya war-zu ar gêr. Dond a ra da zoñj dezañ euz ar pez a oa c'hoarvezet gantañ abaoe ar mintin, hag e kav dezañ n'emañ ket an Aotrou Doue a-du gantañ.

-Nann, emezañ en eur skrabad e benn, n'em-eus ket greet mad o kemered an arhant-mañ, bremañ her gwelan sklêr... Kaoud bahadou digand an Toli ha Jozon !... Beza ampoezonet en ostaleri Soaz, eur vaouez ker mad d'ar paour !... Me 'gav din emañ an Aotrou Doue war va lerh... Hag evelato, pa zoñjan piz ha mad, da biou e ve an arhant-mañ nemed din-me ? Hag ouspenn, piou en-deus va gwelet ouz hen dastum ?... Mond a ran atao d'ar gêr, ha goude-ze me a welo : disul marteze ne daio ket an traou ganen evel-henn.

Nag a boan a vez o tiskregi diouz madou dastumet gand displeaded ! Na gand pegement a êzamant e teu an den paour d'en em zalla war e gont e-unan !

En eur zoñjal en traou-ze, Per en em gavas dirag bali Kerfrekant, hag eno e kavas adarre, gand e gi, ar paour-kêz dall en-doa gwelet diouz ar mintin hag en-doa lavaret dezañ : « *Koll a rit an arhant-se !* » Trei a reas diwarnañ evid mond dre an tu all euz an hent braz. Kaer en-devoe, ar hi hen anavezaz. Kerkent ha ma oe en em gavet dirazañ, e laoskas e glozenn da goueza euz e henou, evel diouz ar mintin ; hag evel pa vije fae gantañ, en dro-mañ, sellet hepken outañ, e troas krenn dioutañ en eur yudal, evel ma yud ar chas pa zantont c'hwez ar bleiz. Ar paour dall, gand eur vouez kreñvoh c'hoaz eged diouz ar mintin, a grias warnezañ :

-Krouadur, en neñv ez eus unan bennag ha n'eo ket aviz ganeoh.

Per ne respontas grik. Trei a reas ar hleuz ha, buanna ma helle, e kerzas gand e hent. Ne oufen ket lavared deoh petra a zo bremañ en e spered, ar pez a zo gwir eo e oa savet ar gwad d'e benn evel ma sav da benn ar re o-deus mez.

P'en em gavas e Pont-an-Traoñ, e chomas a-zav, souezet, spontet zoken. Eno, evel a ouzoh, en-doa prenet digand Kolaig Leskonneg kouignou hag a oa deuet da drei e kabellou-touseg. Mad, chomet e oant eno ivez o-daouzeg, c'hweh a bep tu d'an hent braz ha daou baz etre pep hini. N'oa ket a-walh c'hoaz kement-se : war bep hini euz ar habellou-touseg e oa bremañ eur pezh arhant, heñvel-poch ouz ar re en-doa en e hodell, ha daoulagad an hini a oa merket war ar pezh arhant a oa war ar habellou-touseg, a lugerne war-zu ennañ, evel daou gef-tan ruz.

En dro-mañ e krogas, evid mad, aon e Per. N'eus forz dezañ pe du selled, ne wel nemed kabellou-touseg, ha warnezo daoulagad ruz o lugerni warnañ. Krena a ra... N'eo ket evid mond war e giz, rag soñj a deu dezañ bremañ, en eun taol, er gwall draou a zo c'hoarvezet gantañ e Ploueskad ; n'eo ket evid mond nag a-gleiz nag a-zehou, rag an daouzeg kabellou-touseg, gand o feziou arhant lugernuz, a zo c'hweh a bep tu dezañ ; n'eo ket evid chom e-kreiz an hent kennebeud, rag daoulagad ruz ar peziou arhant a zev anezañ. Petra 'raio ivez 'ta Per ?... Kemer a ra eun tamm penn-herr, hag e sav d'ar haloup war-zu ar Hrinou. A-raog m'oa savet d'an neh 'oa deuet ar berr-alan dezañ : chom a rankas da ehana. Distrei a reas da zelled war e giz, gand aon na vije deuet ar habellou-touseg d'e heul... Nann, n'oant ket deuet ; chomet e oant el leh m'edont a-raog, mez troet e oant, avad, o-daouzeg, da zelled outañ gand o daoulagad a dan.

Per ne chomas ket pell da ehana. Sevel a ra war-zao en eur greña hag en eur skrabad e benn.

-Ya, me 'gred, emezañ, em-oa greet fall o tastum an arhant-mañ ; me her haso da gichenn ar ganol, d'al leh m'am-eus her havet. Koulskoude m'her hasan di, unan bennag all hen dastumo. Daoust ha n'emañ ket kerkoulz em godell-me eged e godell eun all ?... Evelato ar paour dall en-deus lavaret din e oa en neñv unan bennag ha n'oa ket aviz ahanon... Daoust hag an Aotrou Doue e ve hennez ?...

En eur zoñjal en traou-ze, e galon etre diou, etre beza laer ha beza leal, Per, e benn pleget, a ya war-zu Pont-Krist.

P'en em gavas el leh m'en-doa prenet, diouz ar mintin, e neziad laboused bihan, e chomas mantretoh eged biskoaz, rag kleved a reas e laboused o krial warnezañ. An oll o-deus klevet ar pistraked o kana, pe o krial. Gouzoud a rit e vezont gwelet war beg eur skourr spern, pe war horre eur vojenn lann o krial, pa welont unan bennag : Pis... trak...trak...trak...trak... trak... pis... trak... trak... trak... trak... trak... Ha c'hwi a oufe petra a gan bremañ ar pistraked bihan, o-femp, hag an daou goz a-unan ganto ? O ! ya, Per a grene, ha leh da ober en-doa. C'hwi hoh-unan ho-pije krenet kement hag eñ, ma vijeh bet en e leh ; rag bremañ ar pistraked ne ganent ken o hanaouenn goz ha boazet : Pis... trak...trak...trak...trak... trak... kana a reont : Per, laer... laer... laer... laer... laer... Ha n'eo ket spontuz kleved laboused o kana traou er hiz-se ?

Per ne gred ket sevel e benn ; bale a ra buanna ma hell... Kaer en-deus bale buan, ar pistraked, tri en eun tu d'an hent braz, ha pevar en tu all, a nij d'e heul, diwar beg an eil bod lann war egile, hag o-zeiz e krint, pep hini d'e dro pe daou pe dri a-unan, ha c'hoaz kreñva ma hellont :

-Per, laer... laer... laer... laer... laer... Per, laer... laer... laer... laer...

En dro-mañ avad e teu Per da skedi war boull e galon, en eur lavared :

-Ya, pehet em-eus : mond a ran da restaoli va arhant, mond a ran d'her has d'al leh ma 'm-eus her havet. Me a gave din ne anaveze den va havadenn, pa lavarinn gwell, va laeroñsi ; eo, Doue hen anaveze ; hen diskouez en-deus greet din dre va fez-arhant *fas* en daou du, dre va houignou troet e kabellou-touseg, ha dreist-oll dre gan flemmuz ar pistraked-mañ. Mez Doue a zo madelezuz ; me a yelo da goves, ha Doue va fardono.

Kaer en-doa Per kaoud keuz ha glahar, ar pistraked a yee atao didruez d'e heul, ha ne ehanent da grial warnezañ :

-Per, laer.. laer... laer... laer.. laer..., Per, laer... laer... laer... laer.. laer...

Per, abaoe ar mintin, a ree ar skouarn vouzar ; n'en-doa ket greet van ebed evid gweled burzudou ; ha c'hwi a gavo iskiz ma teu an Aotrou Doue, d'e dro, da ober ar skouarn vouzar ha da zerri, evid eur pennad, dor e galon ?

Edo en em gavet gand ar wazenn-zour a zered diouz Lanrial ha milin Sant-Jorj, pa welas o tond, d'an daoulamm ruz, daou archer war varh, dre an hent a zo etre Ker-Yun ha Kereloun...

-A ! den n'en-doa gwelet va laeroñsi, eme Ber. Koulskoude, setu amañ archerien !...

Eur hwezenn yen a bizennas en eun taol war dal Per ; ruilla a ra an dour a-hed e ziouvoh, krena a ra war e dreid, beh en-deus o chom en e zav, ar berr-alan a zo gantañ... Hag ar pistraked, ken didruez ha biskoaz, a gri atao war e lerh :

-Per, laer... laer... laer... laer... laer... Per laer... laer... laer... laer... laer...

-Greet eo ganen en dro-mañ, emezañ, greet eo ganen ! Erru eo an archerien d'am herhad, d'am has d'ar prizon, d'ar gaelou zoken, marteze !...

Hag ar pistraked a gri atao :

-Per laer... laer... laer... laer... laer..., Pe laer... laer... laer... laer... laer...

C'hoant tehed diwar an hent braz war-zu Lanrial a deuas dezañ. Edo o sevel dre ar skalier e gwaremm ar Huiok, pa welas, e skeud ar roh, m'edo eñ e-unan, en devez a-raog, pa deuas eun aotrou da houlen digantañ peleh e kavje dour da rei d'e varh, eun aotrou all, baro hir dezañ, gand eur marh du evel eur vran ; hag e zaoulagad a lugerne ouz Per gwasoh c'hoaz eged daoulagad ar peziou arhant a oa war ar habellou-touseg e Pont-an-Traoñ.

-Re eo kement-mañ ! eme Ber. Dirazon eur marheg gand eur marh duet gand moged an ivern ; dirazon daou archer ouz va hlask ; war va lerh pistraked o lavared d'an oll n'on nemed eul laer ! Gwelloc'h e kavan mond d'en em veuzi... Doue a welo em-eus keuz d'am fehed, rag teuler a rin an arhant war an trêz, el leh m'am-eus her havet...

Ha Per, evel pa vije kollet e benn gantañ, a gerz d'ar red war-zu ar ganol, d'al leh m'en-doa greet e gavadenn.

Ha, dre ma'z ee, ar pistraked a yee war e lerh, en eur grial gwasoh-gwaz :

-Per laer... laer... laer... laer.. laer... laer.. Pe laer... laer... laer... laer... laer...

P'en em gavas e-kichenn ar ganol, e kavas eno, azezet, eun den koz, touzet e benn, e zremm dizebet ha drouglivet. Evid dillad, n'en-doa nemed eun tamm mezer groz a ziskenne euz azaleg e houzoug beteg e dreid, hag a oa stardet gand eur gordenn en-dro d'e groazlez. N'oa ket brao da weled, ha koulskoude ar peoh a galon, ar vadelez hag ar garantez, a oa merket war e dal. En e gichenn e oa eur vaz hir hag, ouz beg ar vaz, eun tamm bara torz e-touez eun tamm lien. An den koz-se 'oa sant Gwевrog, en-doa savet e gouent war devenn Gwinevez, dirag bourk Trelez. Tammou euz ar gouent-se a weler c'hoaz hirio, dreist-oll ar chapel hag an aoter a zo a-zindanni eur feunteun hag a zo dour dous enni ha mad da eva. Vanan em-eus hen tañvaet, eviti da veza e-kreiz an trêz, war horre an tevenn hag e-kichennig ar mor braz.

Sant Gwевrog, en eur zistrei a Berroz, e leh m'en-doa eur gouent all, a oa bet o pardona e Gwengamp hag e Sant-Yann-ar-Biz... A-raog mond en e gouent, e oa chomet eno, war an abardaevez, da walhi e dreid evid en em ziskuiza euz e hent.

O kleved Per o tond war-zu ennañ d'ar red hag en eur huanada, e troas e benn. Kerkent her gwelas o tiskarga e hodellou hag o teuler arhant en dour, evel pa vije kollet e benn gantañ. P'en-devoe diskarget e hodellou ha stlapet en dour kement gwenneg en-doa, edo o vond e-unan a-benn herr d'en em deurel war e benn er ganol. Ar zant, ouz e weled, a zavas en eul lamm en e zav, a redas d'her haoud, a grogas en e vreh, en eur lavared dezañ :

-Da ober petra ez it aze, va bugel ?

Per a zavas e zaoulagad da zelled ouz ar zant hag, o weled peger madelezuz, peger karantezuz e oa an êr anezañ, a zantas e galon evel o teuzi en e greiz, hag a respontas en eur ouela :

-Pehi am-eus greet en eur gemered madou va nesa ; n'eus pardon ebed evidon.

-Eo, va mab, pardon a zo evid pep pehed, gand ma vezo kovesaet ha bet keuz dezañ.

-Nann, evidon-me n'eus ket. Sellit, den koz, ha ne welit-hu ket aze o neuñv war horre an dour ar peziou arhant am-eus laeret, hag o daoulagad o lugerni warnon ? Gweled a rit ne deont ket d'ar goueled, na gand an dour kennebeud ; ne reont nemed troidellad an eil pezh war-lerh egile, evel pa o-defe c'hoant da lammed er-mêz ha d'am zacha en dour ganto ?

-N'eus forz ! keuz hoh-eus e gwirionez d'ho pehed, hag hen anzañ a rit ?

-Ya, keuz am-eus d'am fehed, Doue hepken a oar pegement ; Hag hen anzañ a rankan, pa 'z eo gwir e teu beteg al laboused bihan zoken da lavared din'on nemed eul laer. Evelato, me 'gave din e oa va fehed hanetr-bardonet pa 'z eo gwir den n'en-doa va gwelet, mez e feson an dra-ze n'eo ket gwir.

-Mad ! Pa hoh-eus keuz er hiz-se d'ho pehed, ha p'hen anzavit ken didroidell, me, en ano an Aotrou Doue, a ro deoh ar pardon hag an distaol anezañ. Hag evid diskouez deoh ez eo gwir ar pezh a lavaran, ez an da gas da oueled ar ganol ar peziou arhant a welit o neuñv war horre an dour ha na ehanent da lugerni ouzoh.

Ker buan sant Gwевrog a zoublas, a grogas en eun dornad trêz hag hen taolas er ganol, hag ker buan all ivez ar peziou arhant, a oa war horre an dour, a yeas oll n'on dare da beleh. Eur zutadenn hepken a oe klevet, pa oant o vond kuit.

Sant Gwевrog a oa c'hoaz o kentelia Per, pa deuas seiz eur da zon e bourk Ploueskad. D'an eur-ze ez a Biel ar hloher da zon an *Angelus*.

-Evid trugarekaad Doue hag ar Werhez Vari, e vamm benniget, eme ar zant, da veza ho tistroet diwar an hent fall, en em daoulim amañ on-daou, va bugel, hag, a-greiz or halon, lavarom an *Angelus*.

Per, dizammet euz e behejou ha troet ouz Doue, a zaoulinas kaloneg, kroazet e zaouarn. Sant Gwевrog, daoulinet en e gichenn war an trêz, a zav e zorn dehou d'e dal evid ober sin ar groaz. A-veh m'en-doa lavaret *In nomine patris*, ma oe klevet o tond en eur youhal, en eur behi ken a dregerne an aod gantañ, adaleg Milin-ar-Gall beteg Tour-ar-Hernig, an aotrou barveg a oa gand e varh du e gwaremm ar Huiok. Ker buan ez a, ma weler nemed e zaoulagad o vervi en e benn evel daou gef-tan, ha luhed en-dro dezañ. Krena a ra an douar a-zindan treid e varh ; mond a ra a-benn herr war-zu ar ganol, el leh m'en-doa Per taolet e arhant, lammed a ra enni, loen hag all... An dour a strinkas a dro-war-dro, hag ar ganol a vervas evel ma verv an dour pa vez soubet ennañ eur hef-tan pe eun houarn ruz bennag. Eur poufad moged teo a zavas en êr hag a zegasas an noz du en eun taol : a-veh e weled pal an dorn. Ker buan e santjod an douar o krena hag e klevjod ar reier o frailla, o terri, o rigougnad an eil roh ouz eben, evel pa vije deuet oll diaoulou an ivern, gand o morzoliou pounner hag o liñveriou<sup>19</sup> dir kaled, da veza tennerien mein en aod ar Hernig.

Per ar Hraver a gren evel eur bern deliou. Krena a ra, rag aon en-deus na ve an diaoul oh her samma gantañ.

Sant Gwевrog, ken dineh evel pa vije bet o pedi Doue en e gouent, a grogas en e zorn, en eur lavared dezañ :

-Na grenit ket, va bugel ; treh eo atao an Aotrou Doue d'an drougspered.

Ober a ra sin ar groaz ha ker buan an trouz a baouezas, ar moged a yeas da netra hag an amzer a deuas da veza ker brao ha biskoaz. Per a zispourbelle e zaoulagad da zelled a bep tu dezañ ; soñjal a ree e ranke, goude kemend a drouz, beza troet ar bed war an tu all. Nann, an traou a oa chomet evel m'edont a-ziagent, nemed eun dra evelato.

E-harz treid Per ha sant Gwевrog, el leh ma rede a-raog, plên ha flour, ar ganol a ya euz a Vilin-ar-Gall d'ar mor braz, ez eus bremañ eun toull don ha ledan. Eno, e-leh mond war eeun, e chom bremañ an dour da ehana, da ober troidellou, evel pa ve o para war eun dra bennag. A-wechou zoken e weler toullou moan ha don war horre an dour, amañ hag a-hont, e-kreiz an

---

<sup>19</sup> liñveriou : lohous.



troidellou, evel pa ve unan bennag er foñs, - m'en-deus *Toull al Lakez* eur foñs all nemed an ivern, - o klask sachañ d'ar goueled an neb a dostafe. An toull-ze a oa greet gand an aotrou barveg, a oa en em stlapet er ganol gand e varh du ; hag hennez, an aotrou-ze, a oa an diaoul, lezet gand Doue da zond war an douar da glask tud da vond da zevi gantañ d'an ivern, ha kaset war e giz d'ar gêr dre govesion vad Per ar Hraver ha pedennou sant Gwevrog.

Hag abaoe, tud ar vro o-deus greet *Toull al Lakez* euz an toull-ze, ha den ne gred tostaad outañ hep krena, ha kaoud eun tamm enkreuz en e galon.

A-raog en em zispartia, sant Gwevrog a lavaras da Ber ar Hraver :

-Va bugel, diouz ar pezh a zo c'hoarvezet ganeoh hirio, deskit n'o-deus morse talvoudegez hir ar madou dastumet gand displealded pe gand laeroñsi ; ha dalhit soñj euz ar pezh a lavare on tud koz : *Bleud an diaoul a ya da vrenn...* Gwelloh eo beza paour ha beva e karantez Doue eged beza pinvidig ha beva a-du gand an diaoul. Deskit c'hoaz, va bugel, n'eo ket diskarg ho koustiañs, abalamour ma n'oh ket bet gwelet gand den o pehi. Ouz an dud e hellor kuzed a-wechou, ouz Doue morse ! Na dit ket 'ta da gredi ar pezh a lavar kalz peherien, o-deus c'hoant da vouzara o houstiañs ha d'en em zalla o-unan : *Pehead kuzet hanter-bardonet*. Nann ! Doue a wel beteg goueled ar galon ; den ne hell kuzed netra outañ. Hoh-unan hoh-eus her gwelet hirio. N'eus forz peger kuzet e ve eur pehead, evid beza pardonet gand Doue, e rank beza disklêriet ha kovesaad.

\*

Setu aze, va hamarad Fañch ar Moan, ar pezh am-eus kavet el leoriou koz diwar-benn *Toull al Lakez*.

-

-

-

-

-

-